

KANTIG SANT EDERN

DISKAN: O sant Edern, o sant patron,
En hor spered, en hor c'halon,
Lakit ar zonzj, en han' Doue,
Eus silvidigez hon ene.

- 1) E bro Erin ez eo ganet
Wardro fin an navet Kantved;
Met dont a ra, adreus ar mor
Da zouara en hon Arvor.
- 2) E koat ar Yeuc'h, en eul lochen,
Ar zant, er peoc'h, a vev laouen.
Met hep dale, e red ar vrud
Eus e vertuz etouez an dud.
- 3) Evit guelloc'h en em guzat
Edern a zeu dounoc'h er c'hoad,
Sevel a ra eul loj neve
Hag eur chapel evit Doue.
- 4) Eno e amzer a dremen
Tre, al labour hag ar beden,
Eno, bepred, ha deiz ha noz
Ema e zonzj er baradoz.
- 5) Edern en deuz eur galon aour
Evit entent euz an dud paour;
Hag e-unan, 'vit o zikour
A vev diwar bara ha dour.
- 6) En despet d'e vadoberou
Flemmet ez eo gant gwall-deodou;
Setu maz eo red d'an ermit
Kemer an bec'h ha troc'ha kuit.
- 7) Aman neuze e kav goudor,
- 'Vit hor parrez pebez enor! -
E koat ar Roc'h, an den zantel
A zav da Vari eur chapel.
- 8) A c'houdevez, hed e vuhe,
E holl amzer 'zo da Zoue,
Holl da Zoue dre ar beden
Ha dre ar rusta penijen.
- 9) Ha Doue, en e vadelsz,
Dirak kement a zantelez,
A ra dreizan meur a varzud
'Vit skigna feiz etouez an dud.
- 10) Eun deiz, e veler eur c'haro
Spontet dirak dremm ar maro
O tont a diz da glask goudor
Da loj ar zant bepred digor.
- 11) Edern a zifen al lôn mut
Eneb ar chas, eneb an dud;
Ken dous ez eo ha ken tener
Ma ra outan e zervicher.
- 12) Pa varv, karget a veritou,
E lez ganomp e relegou
Hag e ene d'ar baradoz
A nij da gemer e repoz.

